



SELLOÙ KROAZIET INDIA 2019

Namaste !

Demat an ene, an doueel zo ennon a stou dirak an doueel zo ennout.

« Ma ene a salud da ene. Ennout e saludan an egorenn-se m'emañ an hollved en e bezh. Ennout e saludan ar sklêrijenn, ar garantez, ar gened, ar peoc'h peogwir emañ an traoù-se ennon ivez. Dre ma lodomp ar perzhioù-se ez omp stag an eil ouzh egile, ez omp heñvel, n'omp nemet unan. »

Ar Mudra Namaskar a zo an doare da lakaat e zaoarn, gant an daouarn juntet da live ar chakra kalon, hag a vez graet en ur lavaret Namaste.

Spi am eus e tagaso ar veaj-se da soñj dit emañ an eürusted en hor c'hichen hag e spin ac'hanomp da bep mare. Trawalc'h eo kutuilhañ anezhi en ur deurel evezh outi un tammig, aze emañ hud ar vuhez da bep analadenn. Gant pep enanaladenn e kevreomp ouzh an natur, ouzh skinoù an heol, ouzh ar boudoù bev hag a anal ar memes aer evit azgenel dizehan. Energiezh ar Vuhez a vez o vont drezomp dibaouez. N'eo ket hor relegoù nag hon aonoù a lakaio ac'hanomp da vezañ seder, ar momed a vremañ hag ar pezh a brof deomp ne lavaran ket.

Penaos em boa graet anaoudegezh gant India :

Aet e oan kuit da India ur wech kentañ e miz C'hwevrer 2019 eta evit heuliañ ma stummadur 200 eurvezh kentañ evit dont da vezañ kelennerz Yoga doare Hatha Hengounel en un ashram e Khajurâho, el lec'h m'emañ temploù ar C'hamasoutra. Tri miz e oan chomet du-hont o veajiñ gant ar bus, tren, taksi, skouter ha karr-nij evit mont ha dont etre Su ha Norzh India a-bezh. Tennañ a raen fotoioù forzh pegement evel ur bugel en e vleud ! Distroet e oan gant 5000 luc'hskeudenn bet tennet gant ma foellgomzer iPhone 6 adarbaret.

Ar bloaz war-lerc'h e santan ez eo ret-groñs din mont du-hont adarre, desachet ma'z on gant ar skiant liesvilvedel-se, evit gouzout hiroc'h hag en em stummañ muioc'h. Ma c'hentelioù a ra vad a lavarer din, santout a ran ez eo ret din donaat ma anaoudegezhioù evit ar re all hag evidon.

Sklaeraat kevrin bed ar yoga a fell din.

Bolenoù tibetan all a rankan kaout ! Div am boa prenet en Himalaya, fellout a ra din distreiñ gant un dek bennak anezho en dro-mañ, ur pezh-mell efed a reont war ma skolidi ! Setu me en hent adarre gant ma iPhone 6, re verr an arc'hant ganin evit prenañ ur benveg a vicher. Tampir !

E Goa e heulian ma eil stummadur 300 eurvezh. Chañs am eus pa c'hellan mont betek penn. E soñj e oan chom 2 viz ouzhpenn met siwazh ez eus un dra bennak a reer Korona anezhañ, arabat farsal, ret eo mont d'ar gêr, Frañs a laka ac'hanon da zistreiñ diwar zifrae !

Bolenn ebet hag ur c'hant luc'hskeudenn bennak... Evel-se e oa tonket din !

Distreiñ a ran memes tra kreñvaet gant ma 500 eurvezh stummadur ha c'hoant ennon da lodañ al luc'hskeudennoù am eus tennet du-hont...

G.S. : Kalz a anaoudegezh vat a vagan e-keñver an dud a ro an tu din da gas an hunvre nevez-se da ziskouez ma luc'hskeudennoù hag e trugarekaan an hollved ivez.